



354

202

NEDELEG BRO-C'HALL

Kinniget d'am mignon ker, an aotrou abad D. Goaziou.

WAR DON : Minuit Chrétiens.

Unanit holl, Kristenien a Vreiz-Izel,
Ho kalonou gant re hon zoudarded,
A zo du-hont war an dachen a vrezel,
Evit difenn hor Bro vuia-karet.
En noz tenval gwelit hon diwallerien :
He preur, ho tad, ho mab pe ho pried.
Ha, ma oufec'h peger kriz o finijen !
Nouël ! Bro-C'hall a zaspren he fec'hed (Diou wech).

Breinadurez an eneoù touellet
Gant an ifern hag e blijaduriou,
He deus poulset brec'h an Doue disprizet
Da gas warnomp ar gwaso darvoudou.
A boulladou, e-kreiz eun emgann skrijus,
Gwad eus hon gouenn a red heb ehana ;
Ar zamm a bouez en eun doare glac'harus :
Nouël ! Klevit hor Bro-C'hall o ouela (Diou wech).

Gloar da Zoue en uhela an Nenvou !
War an douar peoc'h d'an dud a youl vad.
Jezuz 'zo deut da ginnig d'eomp e c'hrasou ;
Tavit da glemm, intanvez, emzivad.
Eun vleuen gaer a zav war lein ar menez ;
O va mamm-Vro, biken mui na ouelit !
Ra vezo c'hoaz hir-amzer a levenez !
Nouël ! War-zao ! Setu heol ar Gounid ! (Diou wech).

War an talben, d'ar pevar a Gerzu 1916.

TELEN EUSA.